

TARZH

Kelaouenn pep brezhoneger yaouank

Kelaouenn pep ezel KAVY


Kasit ho lizhiri da:

Ronan Jolais

40 rue de Bretagne. PARIS

cccc

"Tarzh" evit tud 'zo!!



Bro GOZH (!)

va zadou

yaouankaet

gant

TARZH!!

Tennet eo bet eus an niverenn-mañ

100 skouerenn hep ken
niverennet eus 1 da 100.

An enor hoich eus da gasut

an niverenn: 68

N'eo ket ur
vuhez da

vevañ

bezañ

Ki-Tarzh!



PERAK EO DIAES BARN AN OBERENNOU E BREZHONEG.

An oberennoù e brezhoneg a zo rouez. Ha barnet ez int. E keñver petra ? E-keñver al lennegezh vreizhek pe an hini c'hallek ? War ar mennozhioù pe an istor a gaver enno pe war ar yezh. D'am soñj e vez barnet re lies un oberenn e brezhoneg war glander ar yezh. Goût 'ouzon ne vez ket lennet an oberennoù-se koulz lavaret nemet gant tud a gav plijadur da studiañ hor yezh. Setu perak ma rankfen lavarout peseurt oberennoù a gavan ar re wellañ ne vefen ket em aes. Daou renkador a rafen a gav din. Unan e-keñver ar yezh. Unan all e-keñver an dudi. Da skouer e kavan brav barzhonegoù Kalloc'h e-keñver ar yezh daoust ma n'on ket ur mailh war ar gwenedeg. Met arabadus e kavan lenn ar barzhonegoù-se. Plijadur em eus bet o lenn "An ti satanazet" met ne gav ket din e vije lennegezh uhel. Dudi am eus kavet e "En ur rambreal" met ne gredan ket ez eo disi ar yezh implijet. Setu perak e kredan eo kalz diaesoc'h barnañ hol lennegezh eget forzh pehini. Hor yezh n'eo ket diazezet c'hoazh. Tud 'zo gant hent an trefodachoù, saourus evit displegañ kofichennoù met re baour evit livañ an holl daslammoù ene. Tud all a zo gant hent ar brezhoneg eeun, dreist evit treiñ pep tra met re reut evit livañ ar vuhez. Tud all a furch er brezhoneg-krenn pa n'eo ket er c'hembraeg evit diskoachañ troiennoù ha gerioù aet da get. Pep skrivagner en-deus eyezh-eñ. Hag an diforc'h etrezo a zo kalz brasoc'h d'am soñj eget n'ez eo etre ar skrivagnerien c'hallek. N'eo ket diazezet c'hoazh hor yezh : aze 'mañ an tu gwan. Dont a raio da vezañ pa vo implijet kalz hag evit pep tra. Met alies ez on nec'het gant kement-se : peseurt yezh implij ? Hini Yeun ar Gow, gant he zroiennoù pobllel, hir ha pouner ka-wechoù, met ken plijus. Hini Roparzh HEMON ken sklaer, met ken "sec'h" a-wechoù. Hini Youenn Olier gant he zorkadoù gerioù dianav. Hini Blerger pe b-Pennaod ken pell diouzh ar brezhoneg komzet. Pep-hini eveljust en devo atav "e" yezh met piv kemer evit skouer. Hag aze e roan un ali d'ar re yaouank : lennit ar muiañ posubl an oberennoù savet gant brezhonegerien a-vihanik, lennit ma c'hellit oberennoù "Feiz ha Breiz", "SAV", "Dihunamb" hag all... Ne vo ket kavet kalz a lennegezh uhel enno met ar yezh a zo kaer ha sur on ma vez kement a dud o deus ur brezhoneg diaes eo dre ma n'anavezont ket mat spered, ijin ar yezh dezho da c'hout ur bern gerioù. O lenn "Feiz ha Breiz" on chomet bamet meur a-wech gant frazennoù berr ha bev ha me da soñjal neuze: "Penaos en dije troet an nevez brezhoneger. Moarvat n'en dije ket troet ken brav !".

Grit war-dro yezh ar bobl. N'eus tra gwelloc'h evit frammañ ho prezhoneg. Goude-se e vo tu deoc'h komz diwar-benn pep tra. Framm ho yezh a vo breizhek hag e vo ho pennadoù displeget en ur brezhoneg reizh.

GWENNOLE.

Un den a bign gant an hent. Un all a ziskenn gantañ. An hini kentañ a lavaras "Pignat a ra an hent". E gile a eilgerias : "Diskenn a ra". Hag en em gannont an eil hag e gile. Klozadur : Daou gorf marv.

P I V eo Gwennhael HELOU ?

Anavezet eo gant paotred KAVY-Paris ha gant ar re o deus bevet e ti Yaouankiz. Ur penn blev berr du, daoulagad lemm, ur mousc'hoarzh goapaus war e vuzelloù. Leonad eo - Pagan kentoc'h - studier war ar medisinerzh. Ne zisplij ket dezhañ ar mousfent (humour) ha du e vefe hemañ ! Gwech ebet n'eo bet embannet pezh en deus skrivet e brezhoneg. Ar wech kentañ e vo deoc'h enta lenn e skridoù. N'eo ket brezhoneger a-gavell. Anat eo en deus studiet hor yezh. Roet en deus din un troc'had mat a bennadoù, lod ahezho hir a-walc'h. Va soñj war e bennadoù ? ret eo din o lenn gant ur geriadur. Gwennhael a seblant bezañ plijet gant ar gerioù dianav-krenn, ar re a zasson iskiz. E bennadoù e komz-plaen a gaver enno sonerezh. Meur a wech em eus soñjet e Kerwerziou. Diaes da lenn, met pavvez studiet, ha n'eo ket lennet e kaver traou plijus-kenañ. Ne lavaran ket eo disi pezh a skriv. Spi em eus e studio ar yezh poblek gant kement a aked hag en deus studiet ar gerioù. E giz-se e c'hell dont da vezañ ur gwir skrivagner.

GWENNOLE.

- gourzh = a-eneb N'eus netra da ober gourzh° sotoni ar glav. Eñ a gouezh hep prederiañ, a c'hleb holl, a vreïn ar foenn, a c'hlec'h ar vouilhenn.
- jagud gw. jagudiñ Kougant° e ro buhez d'ar plant; ar geotenn a jagud° druz ha boujant gw. R H. boujant°war a lavar ar c'houer. Hogen ha n'eo ket un touell memes tra ? Ar glav n'en deus ket a ene, ha se a vez an tamall brasañ a c'heller sevel outañ.
- displetus gw. R H. Kaer eo, met displetus° e gened. Petra ober gant koanter e berlez ?
- edan = dindan Hogen e ro dimp ur gentel vras : edan° an oabl netra stabil.

Gwennhael HELOU.

A-zivout R E I H an A E L E Z.

Ni a zesk hiziv gant ar blijadur vrasañ ez eo bet gwraet ur c'hammed groñs war-du meizadur ar gudenn-se, ken pouezus e pep keñver. Ha n'he deus ket leuniet ar c'homzoù a-hed kantvedoù ha kantvedoù ? Ar gavadenn a zo meneget er Zeitschrift of Biology, Madrid,

MLCXXXIII - pajenn I.

Ur bevoniour a Skol Veur Reichkampfaxoloth, an aotrou Alfredo Horstczynsz - trhwydr y Patatez e anv, en deus dizoloet erfin un dra bennak. Diazezet en deus e studi war ar rakgoulenn-mañ : an Ael n'eo ket na gourel na gwregel. An dreist-awen a oa er mennozh-mañ. Dre un dezastum ken kreñv ha filozofel diraezet eo ganet ar c'hendastum-mañ a reverzh an holl vennadoù diazezet mat abaoe pell 'zo : an ael a zo hepreizh. Estlammusat tra ! Dre studiañ war groueelloù Pseudotriconympha, Rattus norvegicus, oniscus asellus hag Orchestia gammarella eo e teuas da zamwelout

ha plarik da gompren danvez ar gavadenn. An arnodoù bet graet a zo kalz re ziaes evit m'o c'homprenfec'h hag evit-se ne vo lavaret mann war o divout. Met un dra a zo kaset da benn : Reizh an Aelez a zo dizoloet.

Gwennhael HELOU.

Ur film da welout :

E L E K T R A

hervez EURIPIDES, gant Mikael CACOYANNIS.

Skrivet ez eus bet war "Vreiz" : perak lakaat ar Vretoned yaouank da studiañ ar Sevenadurezh latinek pe c'hresianek pa hon eus unan keltiek a zo mat (pe welloc'h) : lavaromp nann da alouberezh hor speredoù... Ar "chauvinelezh"-se ne gav e bar nemet er mank a sevenadurezh diwar-benn Breizh e-touezh kalz a dud eus Kendalc'h... siwazh deomp !

Setu eta ur film gresiat nevez hervez pezh-c'hoari EURIPIDES : E L E K T R A. Kalz traou 'zo da lavarout diwar e benn. An istor : bugale Agamemno, Elektra hag Oréstès he breur a zo aet kuit diouzh palez o zad d'en em guzhat rak eo bet lazhet Agamemno gant e wreg hag e fried-kleiz ("amant" ur vaouez euredet). Met an doueoù o deus gourc'hemennet da Oréstès, ur paotr abaf, adkemer kador-veur e dad, lazhañ ~~he~~ Mamm hag he fried nevez. Adkavout a ra e c'hoar, gwisket e-giz ur sklavez, euredet gant ur c'houer kozh. Hi eo a atizo he **brour** d'ober hervez bolontez an doueoù.

Met kontadenn ar film-mañ n'eo netra. Ret eo din klask gouzout perak ez eo ar film-se unan eus ar re gaerañ a zo bet graet, d'am soñj.

An danvez : ur barzhoneg brogar splann en e noazhded. Pell diouzh "Kerzhit eta bugale ar vamm-vro"... Met deiz ar c'hloaz ne vo biskoazh anezhañ. Evit dieubiñ o bro diouzh ar gwasker eo ret dezho lazhañ o mamm dre urzh an doueoù : skeudenn un tonkad dihabaskaus ... pebezh kentel evidomp.

Lakadur an arvestoù a zo kaer-meurbet; ar film-mañ penn-da-benn a zo bet fiñv-skeudennet en 'diabarzh' war lec'h ar gêr gozh MYCENE.

Roll Elektra kempennet gant Irène PAPAS a zo unan eus ar re gaerañ am eus gwelet N'on ket gouest da zisplegañ fraezh : soñjet em eus en ur seurt Passionaria o vevañ un ofis relijiel.

Ur film da welout ...

Tangi LAURENT.

E D E N N H E R E

Edennig war an douar manet
Goude an here tremenet
Den ebet n'en deus toc'hataet
Va uloc'henn em eus serret
Aze, petra 'raes greunig ed.

Tremen va gwellikañ karet
Dezhi hadennig 'm eus rôet
Paterenn **he** deus kemeret
Gant karantez ouzhin poket
Kant mil trugarez, greunig ed.

AbEnnez - 8 C'Hwevrer 1962.

Ya ! ur bobl a zo e Breizh, gwad kristen ha breizhat en he gwazhied, gouest d'en em lakaat hep ezhomm da gaout mezh war renk ar pobloù all eus ar bed. Mezh ... n'eus ket ken anezhañ. Pe mar deus n'eo ket anat e pelec'h emañ, rak ma vije ur bobl e Breizh e vije bet mestr en e diun draig bennak hag

E Breizh pep den a c'hourc'hemenn
Nemet ar bobl ne ra ken.

Ma vije bet ur bobl e Breizh en divije bet un dra bennak da welout en e aferoù, hag en devije da gentañ unan da vihanañ lavaret da vrizh-aotroned Pariz ha me pe lec'h chom er gêr da ober e renkoù; ez eo gouest a-walc'h ar Vretoned da zibunañ o c'hudennoù o-unan : hag e Breizh an dud e karg n'int nemet Gallaoued pe dud gwerzhet dezho, ar pezh a zo gwashoc'h c'hoazh.

Ma vije bet ur bobl e Breizh evel en amzer gozh, o welout ar goaperezh, ar yuzazerezh hag al laeroñsiou a raer d'ar Vretoned bemdez e pep doare e vije bet berrvet ar gwad en he gwazhied, e vije bet savet en he sav, sonn evel m'eo dleet d'an den bezañ dirak an den : hag e Breizh, ar Vretoned dre blegañ o c'hein da gement bazhataer a dremen a zo deuet da vezañ ker kromm hag ezen ha bec'h avvezo ouzh o digrommañ ken.

.....

Evel-se emañ an traou : den n'am dislavaro.

Ur bobl a zo c'hoazh e Breizh - Nann, n'eus ket.

Ur bobl hag a bleg evel ma ra ar Vretoned, da bep avel, n'eo pobl ebet ken!

Ur bobl hag a laosk bresañ e wirioù pa n'o bres ket e-unan, n'eo pobl ebet ken !

Ur bobl n'en deus preder ebet mui gant traou ar vro, n'eo pobl ebet ken !

Ar pobloù a varv evel an dud.

Pobl Breizh n'eo ket marv kouskoude c'hoazh mar kirit, met war-nes mervel emañ; ,n'eus mui anezhañ nemet ar skeud eus ar pezh m'eo bet bet gwechall; ar re a c'helle reiñ dezhi ur vihez nevez, ar re-se dres eo o deus roet dorn dezhi d'en em lazhañ; ar re-se eo o deus laosket tri gleñved : an diegi, an diouiziegezh hag an dizunvaniezh da spegañ enni hag a deuo a-benn anezhi e berr amzer : e c'hell bevañ c'hoazh ur c'hant vloaz bennak, rak petra eo kant vloaz e buhez ur bobl ? Met war e wele a varv emañ, hag evel-se emañ an traou.

.....

E-lec'h chom da druantiñ, da sellout, pe da gavout abeg, poaniomp holl, pep-hini eus e du, pep-hini hervez e c'halloud. Me 'labouro a glever meur a hini o lavarout, YA ma labour hennezh, NANN ma labour henhont; YA ma vezan en erv-mañ, NANN ma vezan en erv-hont. N'eo ket ourzal evel-se eo a dleer d'ober, met mont atav gant hon erv hep sellout piv a zo war-raok ha piv a zo war-lerc'h. Greomp hon tachad, met lezomp ar re all a venn labourat da ober o hini ivez.....

J.-M. PERROT "Feiz ha Breiz"

gouere 1907 - p. 150-153.

=====MOUSFENTGERMANIA=====

A-du ! - Mat, ez an-me da gemenn ur gwisk a'n danvez-mañ. Hogen e rankan lavarout deoc'h diouzhtu ne c'helline baeañ nemet a-benn tri miz.

- Se ne ra forzh, tamm ebet, Aotrou !

- Mat ! ha pe da vare e vo gwraet va gwisk ?

- A-benn tri miz.

An embregerezh eo a ra ar mestr. - Mat-tre diouzh ar beure-mañ e pasait kalz aesoc'h ! a lavar ar mezeg, frealzus.

- Netra souezhus ! a eilgerias ar c'hlañavour, p'em eus-me embreget an nozvezh-pad.

Embregerezh = "la pratique".

STUDIOMP HOR YEZH

E pep niverenn e roimp deoc'h evezhiadennoù diwar-benn ar yezh. Kel lies gwech e vez implijet a-dreuz ar verb "bezañ" ma ve talvoudus d'hor soñj degas en-dro war an dachenn reolennoù ar yezhadur.

A-wechoù, evel ar wech-mañ, e vo ar pennadoù-se e galleg. Un digarez hon eus : aesaat al labour evit ar re n'int ket boaz gant ar yezh "yezhadurel". Al labour da heul a zo bet savet diwar yezhadur Kervella ha diwar alioù Maodez Glanndour. Ma vez fazioù en displegadur avat war Wennole eo e vo ret teurel ar brall.

G.S. : Yann Kerlann en deus prometet deomp notennoù diwar-benn ar fazioù graet dalc'hmat gant an nevez-brezhonegerion.

I - Le verbe BOUT, BEZAÑ :

Le verbe être a trois formes :

1° la forme "être, existence"

2° la forme "être, habitude"

3° la forme "situation dans le temps et dans l'espace".

Les 2 dernières formes ne sont utilisées que pour le présent et l'imparfait.

Nous allons donc étudier le verbe être pour ces 2 temps.

FORME 'EXISTENCE'

Il est nécessaire au préalable de définir :

un sujet est dit défini quand il est précédé de an, ar, al

un sujet est dit indéfini quand il est précédé de un, ur, ul, un nombre quelconque, kalz, nebeut.

1° Dans une phrase affirmative où le sujet précède le verbe : +- (a) Z O

(a) O A

2° Dans les autres cas, on utilise : Présent : on, out, eo, omp, oc'h, int, eur.

Imparfait : oan, oas, oa, oamp, oac'h, oant, oad.

2 - Remarques

a) Un verbe peut être sujet : Laerezh a zo fall.

b) ne pas se tromper quand on cherche le sujet : va eontr eo tad va c'henderv paotred eo liester paotr.

"va eontr" et "paotred" semblent être les sujets. Il n'en est rien. Si on renverse la phrase on obtient : Tad va c'henderv a zo va eontr.

Liester paotr a zo paotred.

Si l'on veut considérer va eontr et paotred comme sujets on écrira :

Va eontr a zo tad da'm e'henderv

Tad da'm c'henderv eo va eontr.

Paotred a zo liester paotr

pe Liester eus paotr a zo paotred.

° Le problème reste vrai pour l'imparfait :

Va eontr E oa tad va c'henderv = MAT.

Va eontr A oa tad va c'henderv = FALL.

c) Dans la forme négative si le pluriel précède le verbe eo devient int.

Ex. ar vugale n'int ket fur

n'eo ket fur ar vugale (3ème pluriel).

a) Lorsque le sujet est après le verbe, on utilise :

1°) si le sujet est défini : EO - sk. deuet eo va breur.

2°) si le sujet est indéfini, on ne peut alors mettre le sujet après le verbe il faut en faire un complément d'objet direct.

a) si l'action est durable, on peut écrire : A REER.


sk. Kalz tud a zo anavezet : Anavezout a reer kalz tud.

b) l'action est terminée : on utilise EZ EUS (= e kaver)

Ur breur din a zo deuet : deuet ez eus ur breur din.

On peut écrire de même : Anavezet ez eus kalz tud.

mais on considère alors l'action comme terminée.

AN 

V R E Z H O N

Nebeut e vez ar re anaoudek war ar gravez (=religion) Vrezhon e-touesk ar Vrezhoned yaouank. Evit leuniañ an toull-se, e kinnigan deoc'h un Damskeud ag (=eus) hon Doueedoniezh kenelal (=broadel). Ra vo ar pennad-mañ deroù un Anaoudegezh klokoc'heus hon Sevenadur a-berzh ar Vrezhoned yaouank kenelgar (=brogar) !

DON : Don a oa Doueez ar Frouezhusted. Heñvel ouzh DANA, Mamm an Douar en Iwerzhon.

NUZ (kb. Nudd) : Mab Don ha Doue an Heol e pa. Heñvel ouzh an Doue Iwerzhonat 'Nuada Argetlam'. Gwreg Nuz e oa MORRIAU, Doueez ar Brezel. Karout a rae ar gad, ha nijal a eure a-us d'ar c'hadvaoù, dindan neuz ar Vran. O mab a oa GWENN, da gentañ Doue an Isved (kv. Sn. underworld), ha ner (=aotrou) ar gorriganed, hogen diwezhatoc'h e teuas da vout Hemolc'her. Da noz, e tastume eneoù ar re varv, kouezhet war ar c'hadlec'h hag o digase da'n Isved e rene warno ennañ. E gile a oa ar gaouenn.

MAZH (Kb. MATH) : Mazh, Doue ha Breur Don, a oa ur Renner madoberus a'n Isved.

GWIDION : Ur mab arall da z-Don e oa Gwidion. Darwez (Drouiz) an Doueoù e oa ha kelenner war bep tra talvoudus. Kariad an Den e oa, hag e stourme a-eneb da c'halloudoù an Isved. Skoazellet e voe gant e vreuder AMAEZHON (Amaezhon), Doue an Arerezh (=labour-douar) ha GOVANNON, Doue ar C'hoved. Kenheñvel ouzh an Doue Iwerzhonat GOIBMIU. Bresañ a rae ar gourv (=bier) galloudleun karet gant an Doueoù, e c'hovelie armoù galloudus evito, ha brud e c'honzas evel un Hudtisavour.

LEV LAV START (Kb. Llew llaw gyffes) : Priediñ e c'hoar a reas Gwidion. Arc'hantrod a veze gwraet outi. Kerent e voent war gevelled, DYLAN, arouez galloud an Develled ha LEV, Doue an Heol, kevatal d'an Iwerzhonat LUGH. Kevatal ivez d'an Doue galian LUGUS.

DYLAN a yeas abred da vevañ er mor, hag e voe anvet Mab an Donn. Lazhet e voe gant e contr Govannon ha, pa voe marv, e voe lavaret e leñvas ar morioù dezhañ.

Lev ne voe nepred karet gant e vamm hag, e gwirionez, e oa bet ankouaet ganti reiñ un anv dezhañ. Un ankouazh spontus, rak e kreded e oa peurheñvel an anv hag an ene. Hogen e tonellas Gwidion e bried. Gwisket e kereon ez ejont, eñ hag e vab, trema Arc'hantrod, evit ober arc'henadoù dezhi. Pa voent degouezhet, e tis-karas ar paotr ul laouenan en ur skeiñ outañ gant e bav.

Estlammiñ a reas Arc'ntrod dirak e ampartiz hag e vouliñ, o lavarout : "Bizañ a reas al lev (HBr. leu = leon) gant un dorn start". Azgoulenn a reas Gwidion an anv-se evit ar paotr, hag hiviziken e oa anavet evel "Llew llaw gyffes".

Merket e voe Lev evit bout deuet buan-keñañ a vugel da c'hour - arouez anienel an heol - Diwezhatoc'h e skoazellas e eontred da stourm ouzh galloudoù an Develled ha 'n droug.

KERIDWEN - KREIZVI - GWION : KREIZVI a oa Doueez ar Garantez, Merc'h KERIDWEN a oa Doueez ar Varzhoniezh ha 'n Awen ha Penn ar Varzhed.

Ar verc'h dekañ war ar glen e oa Kreizvi hag an den astutañ e oa he breur AVANKDU.

Piaoua a eure Keridwen ur gaoter hudel, hag un died hudel a roe Awen da neb hen ive. Arnodiñ a eure da reiñ Awen da Avankdu divalav, evit ma vizie e lod aesoc'h er vuhez, hogen un den anvet GWION, bet arc'het outañ ganti luskañ an dram, hen evas e-unan. Evit tec'hout diouzh konnar Keridwen e rankas Gwion daskemmañ e gorf dindan arrizhoù (HBr. arrith : "apparence") niverus. Krediñ a reas e c'hellfe he zouellañ dre gemer arrizh ur c'hreunenn winizh, hogen e teuas Keridwen da yar, ha goude redek war-lerc'h Gwion e lonkas anezhañ. Diwezhatoc'h e wilioudas Gwion ha taolet e voe ganti er mor.

(DA VOUT HEULIET)

•• ••• •• ••• ••• ••• ••• •••
•• ••• •• ••• ••• ••• ••• •••
•• ••• •• ••• ••• ••• ••• •••

(arabat lezel ar vugale hag merc'hed kizidik lenn ar pennad-mañ).

Emañ en he gwele. He sell a ra tro ar gambr. N'eo ket hec'h hini. Glas ha sklas. Hag e morenn hec'h eñvor e tarzh ar wirionez : er glinikenn emañ. Hag evel e sav eus ar mor an ober war-lerc'h ar chadenn e teu war-lerc'h ar c'hounioù ar stokadenn : he bugel-nevez-ganet 'zo marv. Met kraban ar boa n a grog ken kriz en he c'hof n'eo netra e-keñver ar glac'gar a zo enni. Gant kement a levnez he deus gortozet an devezh-se ! Ar pouez a sante enni n'eus mui anezhañ met dija e sav ur c'hoant : kaout ur bugel adarre. Ya, sed ar pezh a zo da ober. Diverkañ diouzh e spered ar gwallzarvoud-mañ. Degas d'he gwaz ar bugel ken gortozet gantañ.

Er sal e-kichen :

Ar mezeg : siwazh ! Ne vo ket tu deoc'h kaout bugale ken. Ha gwell e kavan ho kas-hu davet ho kwreg. C'Hwi a gavo ar gerioù evit displegañ dezhi. Ma klaskfe kaout ur bugel e varvfe-hi hep marbet. Dalc'hit soñj eus kement-se.

Ar gwaz a ya e-kichen gwele e pried.

"Kaczhig, arabat deoc'h en em chalañ" hag e kendalc'h d'he frealziñ evit disammañ diouzh he spered ar goll-bugel.

Ar wreg : "O ! Ar gwall-hunvre a zo o paouez echuiñ a fell din pellaat diouzhin ... hag ur bugel hon devo 'keta !"


Ar gwaz : "Evel just, karedig."

GWENNOLE.

MOUSFENT GERMANIA.

Digablus : Gellout a c'hellfec'h memestra menel hep pokañ d'ho kwreg dirak ar prenestr hag enaouet ar gouloù. Gwellet oc'h bet war-dro unnek eur dec'h da noz gant an holl amezeien. Nag ur skouer fall evit ar vugale !
- Ac'h ! Gortozit ! Dec'h da noz ez on bet gant ur c'hile kozh da evañ bier ha da c'hoari c'hartoù en un davarn, betek div eur diouzh ar beure ! Ne oan ket er gêr !

"Prest omp da reiñ ur bajenn d'ar merc'hed" eme Gwennole. N'eo ket ur bajenn a vennhen gwelout monet gante, hogen meur a hini. Gortoz a reomp enta doare dezhe (keloù diganto, mar deo gwell ganeoc'h) - pennadoù war zanvezioù a zere oute dreist-holl. Gwelout a-walc'h a rahen pennadoù a-zivout stammerezh, distennerezh ("repassage"), keginerezh... o tonet digant ar merc'hed. Bec'h dei



X. L A N G L E I Z

15 -28 a viz Meurzh e ti Raymond DUNCAN - PARIZ -

Ret eo d'ar Vrezhoned en harlu bezañ balc'h o welout ur c'henvroad degas glanded ha gwirionder er meskaj euzhus m'eo an arzoù a-vremañ.

Amerikaniz o deus her gwelet mat-tre pa'z eo bet aotreet, ● New York ur c'hentañ priz evit e "Blac'h he daouarn juntret" ha kement-se diwar I48 kasadenn.

An daolenn-se, evel an holl re war ziskouez, a zo ur meulgan d'ar vaouez. Kevrin an dremm, elevez hag haelded an emzalc'h, anao guñv ar melen, ar gwenn hag al louet, glander an tres, mestroniezh klasel (ar ger-mañ en e wellañ talvoudegezh), ar stignadur, an holl elfennoù-se a zelleze ur seurt enor.

Er "Gwerc'hez gant bugel", em eus karet jestr ar vamm, unan ar re vravañ am eus gwelet biskoazh, he divrec'h evel divaskell klozet da ziwall he babig azezet war he barlenn. Moarvat, amañ eo bet X. LANGLEIZ levezonet gant Leonardo de Vinci, hag evit ar stummadur, gant Botticelli.

An "Idol reterel" a laka anat skiant lemm an oberour war an arvestva, ha dreist-holl an hini diaesoc'h d'am soñj, hini ar c'horf. "Plac'h yaouank en ur bar" a zo arnevesoc'h dre an danvez hag an tu d'ober gant al livioù, tommoc'h, skedusoc'h eget boaz gant LANGLEIZ : aspledet ouzh ar c'hontouer, un duardez gant bragoù strizh, tortet dirak ur werenn c'houllo. Er foñs, flammoù ruz an neon lec'h ma tremen trolinenn tud dispis. Ifern anavezet.

Sed aze ar c'hasadennoù am eus karet ar muiañ. Poltredoù all a zo : peurgetket un heuliad tresadennoù dispar, war kartoñs : noazhoù ha patronioù bugale a zegas koun din eus Mariette Lydis.

Da welout e oa !

Alan Ar BERR.

MOUSFENTGERMANIA

Dirak al Lezvarn : "Pegen kozh ez oc'h-c'hwi ?

- Argrediñ a ra an damalliadez.
- "Arabat argrediñ. Labourat a ra an amzer a-enep deoc'h".

Keloù vat : Ar Mezeg : "Rankout a raio ho pried menel hep labourat da viken. Gwreg ar c'hlañavour : "Hag e c'hellan-me hel lavarout dezhañ diouzhtu ? Se a raio anezhañ yac'h en-dro !"

BOURRUSTED AR MAEZIOU

"avit, setu achu an noz,
Du-hont an heol a splann,
Labour a zo ouzh ho kortoz
Er parkoù hag el lann..."

"Beajerion ar-du Alrae, an Oriant, Kemper, difraeñt, ec'h a an tren da vonet kuit."

Fonnu a-walc'h ec'h ae ar gazeg zu gant he hent. Micherourion a gave e gour-savioù KêrAnna, Alrae, Landevan, Landol, Brederion, an Henbont, tud a ziar ar maez o vonet da labourat d'an Oriant, brezhoneg gante ar o diweuz, brezhoneg truezek a-walc'h evit lavarout gwir, ul lavar hanter-vrezhonek hanter-c'hallek, kont Brizeg ivez "N'eo ket mui brezhoneg ha n'eo ket c'hoazh gallek".

- An den a labour ganin a brepar simant... Brav eo "constructica Monsieur K... Oblijet e vin da sortial un dez evit vizitiñ...

Ne oan ket evit monet gant an diviz-se ken poanuis da glevout evit ur brezhongeour hag a-du 'rall ec'h oamp arru e Landol.

Ouzhpenn ul lev em boa da ober evit monet da Vendonn. Neoazh, laouen e vin hep arvar o tegouezh e ti ma moereb - ur c'hoar da'm zad "anezhi" - o chom e Bodeven, parrez Mendonn.

El labour ec'h oa an dud, aes eo goût. Chemel a ran da vabilhat gant ma eontr a vourr bras o tiviz.

E-leizh a draou en deus da lavarout din... Ur mab dezhañ demezet ar sizhun a-raok... Petra oa e verc'heg... Razh va c'hendirvi - 6 anezhe - aet kuit ag an ti ti, ha neuze ar re gozh chomet o unan... O marc'h klañv gant ar fovev (koeñvadur) ... Amzer kriz hag avel ^{lein} en deziou-mañ... Me 'chal pegoulz ec'h arsavo gant an amzer diharak-mañ ?

Goroet ar buoc'hed dezhi ma moereb a zeu da zemata din. Penaos ec'h a ar yec'hed gant ma zad... Ma mamm klañv gant ar pistig bras ha c'hoazh er c'hlañvdi (pistig bras = appendicite) ?

Ha me neuze da zebriñ va lein...

P'end eo gwir ec'h on amañ evit un drebad ec'h eus tu din da ober meur a dra evit reiñ dorn da'm c'herent. Bep mintin, goude lein, e vez lakaet urzh en tiegezh, skupaet an ti, lakaet ar gwlestri (armenerioù hag all) en o lec'h. Ar-lerc'h "Mesk, mesk, ma c'hoavenn - Na tiforc'ho 'l laezh dieuzh an amanenn". Divroñsañ an avaloù-douar a zo ivez ma labour e-pad ma vez ma moereb o kempenn an amanenn. Da gendec'hoaz (kent-ec'hoaz = dibenn ar beurevezh, gw. ec'hoaz e geriadur R.H.) e vez rafjennet ar saout e griziennoù ar parkevier.

Buan e tremen an amzer, setu kreistez. Dav eo ober tan ar an oaled evit poazñ an avaloù douar ha lakaat da zarev' ar ^{gouarn}. E-pad ar pred e vez selaouet ar skingon. D'enderv, golc'het (=gwalc'het, kv. Kb.) al lestri deomp, ec'h

eomp d'ar park. Da beder eur e vez gwraet un arsav. Ne choman ket pell er Park. E-pad ma vez avaloù-douar ar moc'h o poazhañ er gaoter e vez debret merenn-ender. "Un tamm harzell da c'hortoz gwell". Ar-lerc'h e vez bouetaet ar saout. Pe koulz eo ? Emberr e vo c'hwec'h eur. Neuze labour arall : gwiriñ ar buoc'hed, hachañ melchon evit an dez ar-lerc'h, alej koan...

Bemnoz e vez dek pe unnek eur pa vez prest an dud da vonet da gousket.

Plijadur a gavan o chemel àr ar maeziou, evel ma c'h eus her gwelet o lenn ma fennad.

Meur a wezh e kemeran hent ar vorc'h gant ma marc'h houarn da brenañ bara pe vutun evit ma contr, da werzhañ uiou hag amanenn, da gas da zistenn (gl. repasser) jobilinoù ma moereb... (ur jobilin eo ur c'hoef a-gostez Alrae).

Ur wezh arall, me 'lavaro deoc'h penaos emañ tremenet an traou e-pad an eost.

abEnnez.

Ur c'houer, konnaret-tre, ouzh e amezeg :

-Korn an diaoul ! ne c'hell ket padout an dra-se : ho yer 'zo atav 'barzh va c'haol. Ma vefe ar c'hontrol, sur ne vijec'h ket laouen.

-Me, a respontas egile goapaus, ne welan ket perak ne vijen ket laouen ma kavjen ho kaol 'barzh va yer.

Ur roue, skuizh gant e zivinour, a reas e vennozh d'e reiñ d'ar burev. Gervel a reas anezhañ hag e lavaras dezhañ en ur skrignal :

-C'Hwi a oar pep tra, anavezout a rit eur ho marv ?

An divinour, o kompren petra a oa ouzh e c'hortoz, a respontas korvigellek :

-Aotrou, lennet em eus en oabl, ar beure-mañ, e varvfen tri devezh en ho raok.

Ar roue strafuilhet a lezas e vuhez gantañ.

(an daou istor-mañ a zo bet skrivet gant Mikael AODIG.)

KRENNLAVARIOÙ

Gant netra
N'eus ket ezhomm hilienn.

Azen dre natur
Ne lenn e skritur

Mar fell deoc'h-c'hwi gouzout, mouzenn
Sellit ar sil hag ar goupenn
Ha mar befe kaoc'h-saout oute
Ec'h oc'h louzenn, e gwirione (z).

Brenniliz
An tour e kreiz an iliz,
An iliz e kreiz ar vered
Ma 'gredez ket
Kae da welet !

An hini a zebr stlipou
A zebr kaoc'h a wechoù !

Mat eo laezh dous, mat eo laezh trenk
Ha mat da bep-hini gouzout chom
en he renk !

Kalonek a drec'h pep tra.

FURNEZH AR RE GOZH.

Notenn a-bouez :

RENEREZH AR GELAOUENN N'EO KET KIRIEK EUS DANVEZ AR PENNADOÙ EMBANNET.

diouzh muzul o sotoni. Tud diot evel ur voulenn : n'eus forzh dre be du e seller outo ez int ken diot all. Ar re-se n'o deus ken plijadur nemet pa gavont ur bern^xo tiverañ añvouez. Ma ne gavont ket boued diouto en un oberenn bennak e teu dezho kement a rann-galon ma tisonkont o c'hwitadenn flærius warni ha goude-se setu int oc'h embann e pep lec'h eo libout ha kailhar ar pezh o deus strouilhet.

Arabat krediñ koulskoude ne fell ket din e vefe barnet va oberenn. Skridvarnouriezh a zo evit an holl skridoù nemet re war gelaouennoù evel "Ouest-France"... Met piv a gavo abeg em oberenn ? Meizvarnour ebet n'eo evit kompren va labour ha rak-se Yann-Leue a lavaro : "Se a zo diot". Met forzh ne ra roeg ar raned...

Spi am eus ne vo ket lennet ar pezh-mañ nemet gant ar re a zo barrek d'o lenn. O anvioù a c'houlennan diganto kas din rak lavaret ez eus bet din "Gra war-dro an dud uhelsperedek" hag emañ bepred ouzh o c'hlask. Arabat hel lavarout met va soñj eo o lazhañ hag o lakaat e plastik teuzet. Aet kalet ar plastik-se a raio ur brav a arched a vo diskouezet d'ar rummadoù tud a-hed ar c'hantvedoù da zont.

E-bioù e skoio ar re a soñjo va barn hervez ar skrid-mañ hag a vo mantret. Se a c'hellan reiñ da wir hep bezañ er gaou. Evel am eus lavaret c'hoazh n'eo ket mat d'an holl lenn ar pajennoù a zo amañ war-lerc'h. Un aval put ha c'hwerv e vo evit tud 'zo.

D'ar re a lenno ar skrid-mañ e damsklêrijenn an devezh o vont da goll, p'emañ an heol o vont d'en em veuziñ er mor divent ha glasvoull, lagad ruz o sellout konnaret ouzh ar bed gronnet en dev gant mantell bras an noz o vougañ trouz ar vuhez, pe e gouloù lagad an deiz benniget dre-greiz un devezh tomm p'emañ sioul ar maezioù, pa n'eus mouchig avel ebet, pa glever kan ar grilhed ha boud ar gwenan, d'ar re-se e lavaran, kent chom da glask pemp troad d'ar maout, e kavan gwelloc'h evito ez afent da strakal brulu, da dreiñ mein da sec'hañ, da sutal gant o boz d'ar mouile'hi pe da gaoc'hkezeke (doujañs deoc'h) gant ur gordenn eget mont da derriñ o fenn o klask lenn an tamm skrid-mañ ma n'eus ket ganto ur spered digor-kaer ha maz eus darn anezho ouzh va c'has pell-pell diouto, va frealz e vo ivez gwelout pell diouzhin. Hiniennoù ac'hanoc'h a gavo dezho eo deuet re hir ar frazenn diwezhañ-mañ : ho tigarez a c'houlennan. Anzav a ran va gwall met arabat krediñ emañ oc'h ober kudoù. N'on ket eus ar re a glufan, pell a-se, kentoc'h mervel... Gout 'ouzon pa vez lezet gant unan bennak lakaat un troad war e choug e vez lakaet daou.

Marteze e vo tu deoc'h da lavarout : an oberour-mañ a zo ken speredek ma n'eo ket evit ober un dra a-bouez en e vuhez. Neuze e kasin an dorzh d'ar gêr en ur zisplegañ : "Koulz lavaret netra a-bouez nemet ar skrid-mañ".

Paour kaezh Owen Glen a gavo deoc'h... Ya, ya, va zud... Met peseurt diforc'h a zo etre ur roue hag urfoll a gred bezañ roue ? ... Ha goude-se war betra e vo diazezet ho parnedigezh. War ur skrid ? N'ouzit ket 'ta n'eo ket ar skrivagner hag an den ar memes hini?

Ne soñjan ket emañ atav ar wirionez em displegadennoù. Ma vefe bet kavet ganin ar wirionez e vefen marv-mik, marv gant al lorc'h.

Marteze e vo va oberenn dinerzh ha gwanik he mouezh e-kreiz trouz spon-tus ar vuhez a-vremañ met evel-se ho po ar blijadur hag an enor da lenn ur skrid dianav evitañ da vezañ a dalvoudegezh vras. N'eo ket o vezañ na bad ket ut voullenn erc'h en ifern n'eo ket glan an erc'h.

Evel-just n'ouzon ket piv oc'h-hu rak n'hoc'h eus ket bet an enor da vezañ ambrouget betek ennon met a-raok kregiñ gant va levr eo ret din lavarout peseurt den ez on-ne.

Da gentañ e cheñchan bemdez-Doue. Ar pezh ne cheñch ket a varv. Ur meskaj euzhus ha spontus a zo ac'hanon met gwashoc'h eo ar goullou eget ar c'hem-mesk. Paour-raz-iliz, setu va stad. Va soñj eo n'eus ket tu da vezañ pinvidik hep bezañ garv. An den pinvidik eo an hini a zastum ur bern argand, ha goude-se kluchet warnañ, ur mousc'hoarzh yud war e vuzelloù, a sell ouzh ar re all berr o argand. Petra a ran ? Netra met gant gred. Va micher da zont ? Pleustrer